

Pardon Barabbas

Pez en eun daolenn hag eun arvest

Bet embannet heb beza meneget nag ano ar skrivagner, na deizad an embannadur.
Embannet e oa bet gand Feiz ha Breiz. Mojennou kristen.
Modernaet eo bet an doare-skriva.

C'hoarierien

Barrabbas, al laer braz, kondaonet d'ar maro ha lezet da redeg gand Pilat e-leh Jezuz. (40 vloaz).

Abbas Ephraim, tad Barrabbas, ostiz (70 vloaz).

Eliud, mab Barrabbas (11 vloaz).

Kleophas, Deskad d'or Zalver (30 vloaz)

Simon, Deskad d'or Zalver (19 vloaz)

Eun tremeniad, da lavared eo **Jezuz** (33 bloaz).

An traou a dremen e bourh Emmaus, teir leo diouz Jeruzalem, da abardaez ar Zul Fask, d'an trede deiz ma oa maro Jezuz war ar groaz.

Alleluia !

Klevit, tudou ar helou mad
A grede sked Doue an Tad
Hag ho laouenaio ervad
Alleluia !
Alleluia ! Alleluia ! Alleluia !

An aotrou Jezuz a zo beo.
Gwelet eo bet e-tal ar heo,
Savet ezu a varo da veo !
Alleluia !
Alleluia ! Alleluia ! Alleluia !

An dud vad n'o-deus ket gwelet
Zo brao dezo m'o-deus kredet
En neñv e vint degemeret.
Alleluia !
Alleluia ! Alleluia ! Alleluia !

Sul Fask eo sul al levenez.
Sul all ne ra evel hennez
Dudi an dud hag an Êlez.
Alleluia !
Alleluia ! Alleluia ! Alleluia !

TAOLENN OR ZALVER SAVET EUZ E VEZ

Dirag leurenn pe e kosteziou leurenn ar c'haoriva ar ganerien a gan :

Klevit, tudou, ar hleved mad
A gresko sked Doue an Tad
Hag ho laouenaio ervad,
Alleluia !
Alleluia ! Alleluia ! Alleluia !

Unan euz ar ganerien :

An Aotrou Jezuz a zo beo.
Gwelet eo bet e-tal ar heo.
Savet euz a varo da veo !
Alleluia !
Alleluia ! Alleluia ! Alleluia !

Ar gouel a zav hag e weler taolenn Or Zalver savet euz e vez, ar zoudarded a-stok ar horv en e gichenn : ar ganerien a gan e-pad ma chom an daolenn wel : KLEVIT TUDOU

PARDON BARABBAS

E bourh Emmaus d'ar zul Fask da noz. War lez an hent, eun ostaleri.

A-zehou, gwez palmez hag eur mên-harz. A-gleiz, eul liorz gand eun telt e-barz hag eun daol ; en-dro d'an daol teir skaoñ goad.

E-kreiz, ostaleri Abbas-Ephraïm, an nor e-kreiz leurenn ar c'haoriva.

ABBAS EPHRAÏM hag ELIUD, e vab bihan. (Abbas Ephraïm, e)unan, da genta, a zo war an hent o selloud en tu dehou, da lavared eo etrezeg Jeruzalem, evel pa vije o hedal unan bennag).

Abbas

Den ebed !... den ebed atao !

Eliud

(o tond a-gleiz)

Doue r'ho pennigo, tad-koz !

Abbas

A ! bennoz Doue dit, Eliud, va mab bihan. Gwall bet out bet chomet e kêr. Ha klevet az-peus eun nevezenti bennag ?

Eliud

Ne gelver kelou ebed atao euz va zad.

Abbas

Ha koulskoude eo niveruz an dremenidi ; leun-chek eo an ostaleri ; or breudeur a zo deuet a-strolladou, euz ar Syria hag euz an Ejipt, da dremen goueliou Pask da Jeruzalem.

Ya ! ha kalz anezo bremañ, p'eo echu ar goueliou a zo e penn an hent da zizrei d'ar gêr ; gwelet em-eus re Joppe, Ptomelais, Tyr ha Sidon.

Komzet az-peus outo ?

Eliud

Ya ! Oll e leveront heñvel, ar pezh a ouezom on-unan a-benn bremañ : ar bobl, emezo, bodet dirag lezvarn Poñs-Pilat a houlenne ma vije lezet Barabbas da vale ; dor ar prizon a oe digoret d'am zad ; goude-ze, avad, ne ouezan mui petra 'zegouezas.

Abbas

Mad eo ! peogwir e leveront oll an heveleb tra e rank beza gwir. Ya ! va mab Barabbas, da dad, Eliud, eo a zo bet lezet e frankiz, gand Poñs-Pilat, en derhent deh. Ar gouarner en-divije kavet gwelloc'h lezel Jezuz Nazareth da vale, med hemañ a oa degaset dirazañ gand pennadureziou Jeruzalem hag ar re-mañ o-devoa troet ar bobl en e eneb ; ar bobl a houlenne Barrabbas ha Pilat a rankas plega dirazi *(o sevel e zivreh gand laouenedigez)*. Ya ! va mab a zo torret e ereou. *(Teñval e benn)*. Med, perag ne deu ket d'ar gêr ?

Eliud

Chomet e rank beza da dremen goueliou Pask e Jeruzalem.

Abbas

Mar deo evel-se ne zaleo ket da zond. Gortozom eñ eta, heb en em enkrezi re en oll. N'eus nevezenti vraz all ebed e kêr ?

Eliud

O ! eo ; n'eus ano gand an oll nemed euz ar Mestr.

Abbas

Euz Jezuz Nazareth, mab Joseph, ar halvez, o-deus staget ouz ar groaz ?

Eliud

Ya ! ha meur a hini, a-du gantañ, a lavar en-deus greet kalz burzudou.

Abbas

An oll a gomz euz an dra-ze euz an eil penn d'egiel d'ar Jude.

Eliud

Kalon dener en-doa, a leverer ; an oll, braz ha bihan, paour ha pinvidig, a gave degemer laouen, en e gichenn :ne houlenne nemed ober vad.

Abbas

Hag ar bobl he-deus greet dezañ eun degemer euz ar re gaerra, e Jeruzalem, hizio ez eus eiz deiz.

Eliud

Perag neuze, pa grede an oll e oa eur zant eo bet staget ouz ar groaz ?

Abbas

(diskredig)

O ! eur zant ?

Eliud

(gand nerz)

Eur profet, tad-koz !

Abbas

N'em-eus ket a aon o lavared, avad, an dud hen heulie a-vagad.

Eliud

An oll her hare.

Abbas

Ha setu perag e teuas pennou braz Jeruzalem hag ar Pharizianed da lakaad her chadenna ; aon o-devoa en-divije savet ar bobl en o eneb.

Eliud

Me ne garan ket ar Pharizianed ; pa vezom o c'hoari war an hent, ma tegouez gand unan bennag anezo tremen, e rankom skarza ha buan pe on-divije taoliou.

Abbas

(o hoapaad)

Ar re-ze eo a ziwall al lezenn !

Eliud

Tud lorhuz int, tud koz, prest atao da ober fae war ar re all.

Abbas

Jezuz Nazareth a skoe warno dizamant gand komzou hag a strake evel ar gurun hag a zeve evel an tan, ha setu perag o-doa droug outañ ha n'o-deus ket ehanet ken na int deuet a-benn d'en em zizober anezañ.

Eliud

Tud a oa e kêr hag a lavare e oa dleet da Bilat beza e lezet da redeg e-leh va zad ; poan am-eus bet o klevoud an dra-ze, kemend all e karan va zad ; koulskoude, me a gav din em-bije karet ivez ar Mestr. Perag n'en-deus ket Pilat o lezet da redeg o-daou ?

Abbas

N'halle ket hen ober.

Eliud

Gwaz a ze ! Med mar deo chomet va zad e Jeruzalem, en-devezo gwelet, marteze, Jezuz o vervel.

Abbas

Chomet e tle beza kentoh da weled lidou kaer an Templ da zeiz braz Pask ar Yuzevien.

Eliud

Ya ! kaer e tle beza an traou dre eno. Er bloaz a zeu, p'am-bo daouzeg vloaz, ez in ivez da ober va Fask kenta da Jeruzalem. N'eo ket 'ta, tad-koz ?

Abbas

Da dad a «'z ay ganez. (*Azeza a ra, o soñjal*).

Eliud

Hag e klevin an trompillou arhant hag ar hanaouennou kaer hag e welin arbeleg braz.

Abbas

(ne zelaou ket e vab-bihan)

Perag ne deu ket ? Daoust ha mez en-divije o tizrei da di e dad ? Laouen e vezin outañ. Gwelloh e vije bet ganen, sur a-walh, ne vije ket bet en em daolet da ober freuz ha da laerez, evel m'en-deus greet ; med va mab eo evelato, hag ar gwad a red em izili a red en e re. Kee da weled, Eliud, eur pennad, war an hent ; da zaoulagad a zo gwelloh eged va re-me ; marteze her gweli o tond.

(Klevoud a reer eur horn-boud o voudal ; Eliud ne fiñv ket ; Eliud a zav en e zav).

Abbas

E gorn-boud, klaoustre ? evel gwechall. N'her gwelez ket o tond ?

Eliud

(o selloud war an hent)

Eo ! eo ! d'ar red e teu.

Abbas

Eñ eo !

Eliud

(o vond d'ar red da ziambroug e dad)

Va zad !

Abbas

(gand levez)

Barabbas, va mab !

Barrabbas

(o tond dre an tu dehou, e vab etre e zivreh)

Va zad !

Abbas

Va mab !

Barrabbas

(o pokad d'e dad hag o lakaad e zorn war dal e vab)

Da weloud a hellan, pelloh, va mabig paour.

Abbas

E peleh out bet chomet ? Pell a zo e oam ouz da hortoz.

Barrabbas

(souezet)

Petra ? C'hwi a ouie e oan libr ?

Abbas

Ya ! ar bardonerien o tremen o-deus hel lavaret deom.

Barrabbas

Chomet on du-hont e kêr : n'oan ket evid en em denna ; c'hoant gweled am-oa ha gwelet em-eus. *(oh ober an neuz da ouela)*. O ! pebez Pask ! pebez Pask ! euzuz eo !

Abbas

Maro Jezuz Nazareth ?

Barrabbas

Ya ! derhent Pask, digwener diweza, em frizon, youhadennou ar bobl e kounnar a deue beteg va diskouarn ; he hlevet a reen, bodet en-dro d'al lez-varn, o houlenn, evel beb bloaz, e bardon evid eur prizonier, ha Pilat a lavare : « Piou a fell deoh kaoud ? Jezuz Nazareth pe Varrabas ? »

Hag ar bobl a youhe : « Barrabbas ! Barrabbas ! » ha Pilat a gendalhe : « Ha petra 'rin ouz Jezuz a anvit ho Roue ? »

Gwasoh-gwaz ar bobl a youhe : « Kasit hen d'ar maro ! Ni ne fell ket deom kaoud roue all, nemed Kezar. Kasit Jezuz d'ar maro ha stagit eñ ouz ar groaz ! *(gand eur c'hoarz goapauz)*.

Pobl hedro lakaet pennadou enni gand aotrouned Jeruzalem. Petra en-devoa greet an denze dezi ? Netra... nemed vad.

Eliud

Parea ar re glañv, rei ar gweloud d'ar re all, ar hlevoud d'ar re vouzar, ar homz d'ar re vud ; eun devez zoken, war am-eus klevet p'edont ouz e heul, er gouezeri, en-deus maget gand eun dorz vara hag a greske dre ma trohed diuti¹.

Barrabbas

(an anken en e galon)

¹ Parea ar re glañv, rei ar gweloud d'ar re all, ar hlevoud d'ar re vouzar, ar homz d'ar re vud ; eun devez zoken, war am-eus klevet p'edont ouz e heul, er gouezeri, en-deus maget gand eun dorz vara hag a greske dre ma trohed diuti. Notenn gand "Embann an Hirwaz" : huñvreal a ra.

Eñ ! n'en-doa greet biskoaz nemed vad dezo... e-leh me, em-oa o laeret, o diwisket, o skoet ; me 'm-oa lakaet an tan warno, diskaret o ziez, freuzet o hentchou. Me, n'em-oa nemed eur mennoz, p'o hleven euz goueled va frizon : kregi adarre em micher goz, 'dal ma vijen digabestr, d'o laerez ha d'o laza, heb damant, na truez ! A ! pobl digalon z' ahanout, Barrabbas en-divije desket dit petra 'goust terri dezañ e jadennou ! Me...

Eliud

O ! va zad !

Barrabbas

(o kenderhel gand kounnar)

Me am-oa savet dispah ha meur a hini a gollas enni o buhez : me em-oa lazet (*eur mousc'hoarz treñk war e vuzellou*) hag o-deus bet truez ouzn hag o-deus va lezet da redeg.

Abbas

Peogwir out libr bremañ petra 'ra an dra-ze ? Diskuiz bremañ, eur pennad, ha kemer da laouenedigez evel ar re all.

Barrabbas

(oh heja e benn)

Nann ! nann ! laouenedigez ebed ! Me ne vin morse nemed Barabbas al laer ! (*o sevel e zaoulagad war-zu an neñv, gand feiz*). O ! ma vije, e gwirionez, Jezuz mab da Zoue, evel ma lavar e zeskibien, neuze e vije bet gwelloc'h din beza bet marvet, en e gichenn, evel Dismas, al laer dehou, eged beza beo amañ.

Abbas

Petra leverez ?

Barrabbas

Ya ! gwelloc'h e vije bet din mervel, va zad ; pa dennas Jezuz e huanadenn diweza, an douar a grenas ; palenn braz an Templ a rogas, dre e hanter ; teñvalijenn an noz a guzas an heol. Me a oa eno. Me 'm-eus gwelet. Me 'm-eus klevet. Kabiten ar zoudarded o weled an oll draou-ze a lavare : « Ya ! e gwirionez, hemañ a zo Mab da Zoue ! » ; ar zoudarded, daoust ma'z int gwazed ha n'o-deus ket a aon rag o skeud, a grene, evel eur bern deliou, ker stravuillet e oant. Ya ! tad, va hredi a hellit, an den-ze a zo, e gwirionez, Mab da Zoue !

Eliud

(goude eur pennad)

Darn euz e zeskibien a lavar e savo euz a varo da veo : Eñ e-unan en-deus hen lavaret.

Abbas

(diskredig)

Piou a hell sevel euz ar bez... Goude beza bet ennañ tri devez ?

Barabbas

(goude eur pennad)

Jezuz a hell hen ober, goude eur maro evel an hini en-deus bet.

Abbas

Deom en ti, va mab ! ezomm az-peus da ober eun tamm gourvez ; an oll draou-ze o-deus skuizet da benn.

Barabas

Ya ! deom en ti ! Brevet eo va horv ouzin.
(*o-daou ez eont kuit*).

Eliud

(e-unan)

O ! na kaerra tra ! ma teuje, e gwirionez, Jezuz Nazareth er-mêz euz e vez, rag neuze e vije sklêr hag anad e vije eur profet braz hag ar Mesias zoken marteze, ar Mesias e klevom or beleien o komz anezañ hag emaom oll o hortoz. O ! na karet em-eus anavezoud Jezuz, mond d'e heul, gweloud e vuzudou, klevoud e gomzou ; gwall vihan on c'hoaz ; koulskoude, me 'gred en-dije va degemeret en e gompagnunez, ker mad all ha ma oa. Va zad zoken goude beza her gwelet o vervel a zo troet evel eun all en e leh ; me 'gred e chomo bremañ ganeom ha ne 'z ay mui da laer.

(edo o vond en ti pa wel tremenidi o tond).

Setu amañ daou berhirin all c'hoaz ; diwevad eo ; an heol a zo kuzet a-dreñv kern ar menezioù ha koulskoude n'eus ket kalz a bres warno : skuiz e tleont beza.

(Mond a ra en ti... teñvallaad a ra an amzer).

KLEOPHAS ha SIMON

Simon

(a-dreñv ar speurenn)

Emaom degouezet, Kleophas.
(Dond a reont o-daou war al leurenn).

Kleophas

Azezom amañ, eur pennadig, an hent a zo skuizuz.

Simon

Ya ! Nerz ha kalon n'int ket evid herzel atao ouz ar skuizder.

Kleophas

Azezom 'ta, eur pennad, amañ, war ar mên-mañ. *(Azeza a ra)*. Kaoud a raim goude-ze eun ostaleri bennag da dremen an noz.

Simon

Sell, amañ, dres, ez eus unan. *(O tiskouez ti Abbas)*. Gwelom petra eo. *(O lenn war an ti)* : Abbas-Ephraim.

Kleophas

Diwezd eo ! War-lerh goueliou Pask, ar birhired a vez niveruz. Beh on-do da gaoud plas, Simon...

Simon

N'eus forz. Evidon-me, bremañ ne ran ebed ken, gand netra !

Kleophas

Na me, kennebeud. Kaoud a ra din ne hell mui netra glahari va halon, er stad m'emaon !

Simon

(o tenna eun huanad)

Siwaz ! *(Eun tremeniad a deu en o hichenn).*

KLEOPHAS, SIMON hag AN TREMIAD

An Tremeniad

Doue r'ho pennigo breudeur !

Kleophas ha Simon

Bennoz Doue deoh, tremeniad.

An Tremeniad

Doare gwall-drist a gavan deoh, breudeur. E kañv emaoñ da unan bennag ? pe eur gwall zarvoud a vije degouezet ganeoh ?

Kleophas

(sebezet)

Petra ? Ken dianaouedeg-se oh euz an traou a zo tremenet e kêr Jeruzalem ma ne ouezit netra euz ar pezh a zo degouezet eno en deizioù diweza-mañ.

An Tremeniad

Petra 'zo en em gavet 'ta ?

Kleophas

Petra ? Lakaet o-deus Jezuz Nazareth d'ar maro ouz her staga ouz eur groaz.

An Tremeniad

Ha neuze ?

Kleophas

Eun den gallouduz-braz 'oa hennez en e gomzou hag en e oberou, dirag Doue ha dirag an dud.

Simon

Ya ! eur profet 'oa hag en-doa greet eun niver braz a vurzudou. Mond a ree euz ar Jude d'ar Galile, o prezeg d'an oll eul lezenn nevez diazezet war ar garantez hag ar pardon.

Kleophas

Eur zant.

Simon

Deuet a-berz Doue.

Kleophas

Ha koulskoude, pennou braz kêr o-deus lakaet e gondaoni d'ar maro hag e staga ouz ar groaz.

An Tremeniad

Daoust hag ar profet Isaias n'en-doa ket lavaret eh en em gavje an dra-ze gantañ ?

Doue, emezañ, a zammo warnañ pehejou an oll.² Heñvel e vezo ouz eur bod a zav en douar skarnilet ; n'en devezo kened ebed³ ; laaket e vo *da ziweza* e-touez an dud⁴ ; bez' e vezo eun

² a zammo warnañ pehejou an oll : notenn el leor : Isaias, LIII, 6

den a boan ha gouzoud a raio petra eo kaoud poan. Gouliet e vezo evid or pehejou ha bruzunet evid on torfejou⁵.

Simon

Ni a zoñje on tennje a dre daouarn ar Romaned.

Kleophas

Hag e roje he frankiz d'or bro Israel.

Simon

Ha padal eo maro.

Kleophas

Ha tri devez a zo abaoe...

An Tremeniad

(o truezi warno)

A ! breudeur geiz.

Simon

E gwirionez, eun nebeud euz ar merhed a oa ouz e heul o-deus or sebezet gand o marvaillou.

Kleophas

(diskredig)

Ya ! marvaillou merhed ha n'eus netra da gredi dezo.

An Tremeniad

Petra 'lavare ar merhed-se ?

Simon

Traou sebezuz ! Er beure-mañ, kerkent ha goulou-deiz, int eet d'ar bez gand louzeier c'hwez vad. Digwener, gand ar pres a oa da zebelia ar horv a-raog ar gouel, n'o-devoa ket bet a amzer da brena louzeier a-walh. Ha setu, emezo, degouezet, e-tal ar bez, n'o-deus kavet korv ebed ennañ.

Kleophas

Hag ouspenn, - hervez o marvaillou atao, - daou êl a zo en em ziskouezet dezo hag a lavare e oa beo an hini a glaskent er bez.

An Tremeniad

Ha petra o-deus-i greet neuze ?

Kleophas

Unan anezo a zo deredet da gaoud Simon, mab Joas, anvet Per gand Jezuz, ar henta ahanom, goude ar Mestr. Kerkent Yann hag eñ a zo eet o-daou d'ar red, beteg ar bez, ha Yann, ar yaouanka, a zo en em gavet da genta.

³ LIII 2.

⁴ *da ziweza e-touez an dud* : LIII 3

⁵ bruzunet evid on torfejou : LIII 5.

Simon

Hag o-deus gwelet edo an traou evel ma lavare ar merhed.

Kleophas

Med Eñ, den n'en-deus her havet.

Simon

Ha setu perag n'ouzom ket petra e teuim da veza, rag or fiziañs on-doa lakaet ennañ ha bremañ eo maro hag e gorr, zoken, a zo kollet.

Kleophas

Setu perag, va den mad, eo teñval or penn. Te da-unan, ma vijes bet en ol leh, petra 'z-pije greet ?

An Tremeniad

O ! va breudeur, me a ouie an oll draou-ze a-raog m'ho-peus lavaret ano anezo, ha truez am-eus ouzoh o weled peger poud⁶ eo ho spered war ar skritur sakr hag ar pez o-deus disklêriet ar brofeted.

Kleophas

Petra az-peus c'hoant da lavared ?

An Tremeniad

(o sevel e vouez)

Pegoulz e tigoroh ho taoulagad d'ar wirionez, tud dallet 'zo 'hanoh pa ne fell ket deoh gweled bremañ emañ lavarou ar brofeted o tond da wir.

Kleophas

Petra 'livirit ?

Simon

Ho komzou n'int ket sklêr.

An Tremeniad

Daoust ha n'eo ket skrivet, mil bell a zo, e oa red d'ar Hrist gouzañv ar poaniou-ze a-raog pignad da hloar an neñvou ?

Simon

(souezet)

Hqag e kav dit, va den mad, e tle Jezuz Nazareth mond kuit ?

An Tremeniad

Kement tra a zo c'hoarvezet hag a laka ho pennou da veza ken teñval a oa embannet pell a oa gand ar brofeted. Daoust hag ar roue David n'en-doa ket lavaret kement-mañ, diwar-benn ar Mesias, bremañ ez eus mil bloaz : « Heñvelloh on ouz eur preñv eged ouz eun den⁷ ; c'hoarzin o-deus greet ouz va gweled hag heja o fenn o tremen e-biou din ; toullet o-deus va

⁶ poud :e Kerne : pouer.

⁷ ouz eun den : Ps. XXI.

daouarn ha va zreid ha niveret o-deus va oll eskern... rannet o-deus va dillad kenetrezo hag evid gweled gand piou ez afe va zae, o-deus tennet d'ar plouz berr.

Kleophas

Ni, n'eo ket evel-se eo eh ententem ar geriou-ze.

An Tremeniad ha Simon

Eo ! eo ! pep tra a zo en em gavet evel ma livirit.

An Tremeniad

Ha mar deo gwir kement-se, perag e kollit fiziañs ?

Mar deuet da wir, beteg henn, lavarou ar brofeted, gortozit hag e weloh traou estlammusoh c'hoaz.

Daoust hag ar profet Hoseah n'en-deus ket lavaret : « En trede deiz goude e varo e savo da veo hag her gweloud a raim e buhez ! » Fiziañs stard eta, breudeur, ha feiz kreñv.
(An deskibien ne leveront ger ; an Tremeniad a ra an neuz da vond pelloh).

Simon

(ouz e helver)

Den mad, eun dudi eo kleved da gomzou ; nerz ha frealzidigez a roont deom.

Kleophas

Pardaez eo ha re ziwevad evid mond pelloh. Ni a zo o vond da ober on diskenn en ostaleri-mañ ; chom ganoem ivez da dremen an noz ha warhoaz e kendalhim gand on hent adarre on-tri.

An Tremeniad

Ma fell deoh !

Kleophas

Galvom an ostiz.

Simon

(a sko war an nor hag a halv)

Ephraim ! Ephraim !

AN HEVELEB RE hag ELIUD

Eliud

(e toull an nor, o stoui dirag ar veajourien)

Doue ra vezo ganeoh, Aotrouned.

Simon

Te, paotrig, eo mestr an ostaleri ?

Eliud

Nann, va zad-koz eo, Aotrou, med evel m'eo eet war an oad, me a vez ouz e zikour. Setu amañ dour da walhi ho treid... hag eun torch ; goude-ze, petra vo ?

Kleophas

Eun toull da loja hag eun tamm da goania.

Eliud

Hag ho-pezo, Aotrouned, ha diohtu.

Kleophas

Ouz an daol-mañ, amañ, er-mêz, e vezim brao da zebri ; degas an traou deom amañ.

Eliud

Mad ! azezit eta, Aotrouned.

(Mond ha dond a ra e-pad an diviz war-lerh o kas hag o tegas ar plajou. An tri beajour a azez ouz taol, an Tremeniad e-kreiz, dirag an dud, gand an daou zeskibl unan a bep tu dezañ).

SIMON, KLEOPHAS, ELIUD hag an TREMENIAD

Simon

Breur, startaad a ree ar fiziañs bremaig en or halon en-dra ma tispleges dirazom lavarou ar brofeted. Kendalh da gomz deom rag ouz da zelaou e kav deom e klevom ar Mestr.

Eliud

(o tegas bara)

Setu ar bara, Aotrou.

An Tremeniad

Ha n'eo ket skrivet : « An heol a gerzo da greisteiz, ha Doue a holoio an douar a deñvalijenn. »

Simon ha Kleophas

Oll on-eus lennet kement-se.

An Tremeniad

Ha n'eo ket c'hoarvezet dirag ho taoulagad ar burzudou a raje ar Mesias hervez skridou Isaias⁸ : « En amzer-ze an douar fall ha gouez a vleunio evel al lili. Bleunia a raio hag e raio hag e trido gand an dudi hag ar veuleudi. Bez' en-devezo sked al Liban ha roet e vezo dezañ kened Karmel ha Saron hag e welint sked on Aotrou ha kened on Doue. Neuze daoulagad ar re all a welo an deiz ha diskouarnou ar re vouzar a glevo ; an hini kamm a lammo evel eur haro ha teod ar re vud a vezo distagellet mad.

Kleophas

Tri bloaz a zo abaoe ma welom burzudou evel-se.

Simon

Kredi a reem e vije ar Hrist an den gallouduz a dorrje ol liammou, a ziskarje ar Romaned villiget, hag a lakaje or bro da vestrez war oll rouanteleziou an douar.

Kleophas

Hag on-doa kollet peb fiziañs rag gwelet on-doa e lakaad d'ar maro heb na vije deuet Doue d'e ziframma euz a dre daouarn e enebourien.

Simon

Bremañ avad, war ar pezh a livirit deom, e kredom stard e oa eñ, e gwirionez, ar Hrist.

Kleophas

(Eun tamm c'hoaz en entremar e-pad ma teu Eliud en o hichenn).

Koulskoude, ha kredi a rez n'eo ket bet faziet ar merhed hag eo beo or Mestr ?

An Tremeniad

(o poueza war e heriou)

Sur a-walh ? Ya, m'hel lavar deoh, Jezuz Nazareth a zo savet euz e vez leun a vuhez.

⁸ Isaias : Isaias : XXXV, 1, 5, 6.

AN HEVELEB RE

Eliud

(d'an Tremeniad)

Aotrou, euz Jezuz Nazareth n'eo ket 'ta eo e komzit ? Hag e livirit eo savet euz a varo da veo ?

An Tremeniad

Ya ! savet eo ! va mabig. Perag e houlennez an dra-ze ?

Eliud

Me 'garfe e vefe gwir kement-se... ha va zad ivez. Va zad... ma kirit ez in, d'ar red, da lavared dezañ dond d'ho kaoud.

Kleophas

(groz e vouez)

Sell 'ta, paotr bihan, perag e teuez-te d'en em emell euz ar pezh a leverom-ni ?

Eliud

(mezog)

Aotrouned, pardonit din : re hardiz on bet.

An Tremeniad

(ker kuñv ha tra)

Mad az-peus greet, va mabig-me. Ya ! ya ! kerz da gerhad da dad ; ni a gomzo dezañ euz Jezuz Nazareth.

Eliud

O ! bennoz deoh, Aotrou : mond a ran da lavared dezañ.
(Hag ez a).

AN HEVELEB RE nemed ELIUD

Kleophas

Mignon, re vad oh ouz eur c'hwitouz fall evel-se ; hizio ar vugale n'o-deus doujañs ebed ken evid den.

Simon

Ker brao all edom amañ on-tri ; hag ez a da gerhad e dad...

An Tremeniad

Peoh, va mignoned ; an hini a halvit ho Mestr ne gare ket pellaad dioutañ ar vugale ; n'eo ket gwir ?

O haroud a ree dreist ar re all ha lavared a ree e oa ar baradoz d'ar re a oa heñvel outo. Perag ober an heg ouz hemañ ha ne glask nemed kleved komz euz ar Mestr ?

Simon

Gwir eo ! Gwelloh egedom-ni eh heuliit kenteliou ar Mestr.

AN HEVELEB RE BARABBAS hag ELIUD ouspenn

Eliud

Deus, va zad. An Aotrou-mañ a lavar eo beo adarre ar Mestr.

Barabbas

(o saludi an Tremeniad)

Doue ra vezo ganez, tremeniad. Ha gwir e vefe ar pezh a lavar din va mab ? Eo savet Jezuz Nazareth euz ar bez ? Poan am-eus o kredi...

An Tremeniad

Eo, savet eo Jezuz euz ar bez. Kredi a hellez ha kemer fiziañs.

Barabbas

(krena a ra e vouez).

Gwir ? O ! komz din anezañ. Me 'm-eus e welet o vervel du-hont, hag abaoe va buhez tremenet a bouez kement war va halon ma teuan da gredi n'eus nemetañ da helloud tenna ar zamm-ze diwarnon. A-raog hizio, a dra zur, pa zoñjen em fehejou em-eus bet aon a-wechou, ha keuz marteze ; morse avad eur wir hlahar n'en-doa treuzet va halon ken na eo bremañ. E glevet am-eus o pardoni d'al laer a oa stag ouz ar groaz, en e gichenn, hag e kav din e hellfen, me ivez, ren eur vuhez vad evel an dud all. O ! komz din anezañ. Lavar din ha gwir eo e pardon ar pehejou ?

An Tremeniad

Ya, gand ma vije glahar ha keuz dezo.

Barabbas

Lavar c'hoaz petra 'vije dleet din da ober evid kaoud ar pardon digantañ.

An Tremeniad

Beza izel a galon, anzav da zepladurez, kaoud keuz d'az pehejou.

Barabbas

Me 'gred emañ va halon en doare-ze.

An Tremeniad

Red eo ouspenn kaoud ar vrasa fiziañs en e drugarez divent.

Barabbas

O ! Bennoz deoh, va den mad ; mond a rin d'e gaoud, rag fiziañs am-eus ennañ. Koulskoude ha ne gav ket deoh e vefe pehejou a zo kalz re vraz evid ma vije gallet o fardoni ?

An Tremeniad

Nann, hini ebed, rag lavaret en-deus : « muioh a levenez a vezo en neñv evid eur peher hag a ra pinienn eged evid deg den mad ha n'o-deus greet pehed ebed. »

Barabbas

Aotrou, eur goulenn all c'hoaz ? Ha gwir eo e tegemer an oll, heb lezel den a-gostez ?

An Tremeniad

Pardonet en-deus da vaouez Samari.

Simon

Hag eun dro all, en templ, d'eur vaouez all, tapet oh ober an droug, e-kreiz an noz, hag edod o vond da laza a-daoliou mein.

Barabbas

Ha Barabbas, kaoud a ra deoh en-defe truez outañ ?

An Tremeniad

Ha perag n'en-defe ket ? Judaz e-unan ma karje beza bet bet keuz d'e behed, e-leh en em rei d'an dizesper, en-divije bet e bardon.

Barabbas

(nerzuz)

Mar deo evel-se me a 'z ay da gaoud Jezuz Nazareth, me a en em daolo e-harz e dreid hag em-bo va fardon digantañ. O ! bennoz, bennoz deoh, den mad, evid ho komzou frealzuz, rag me eo Barrabbas, al laer braz Barrabbas ! *(An deskibien souezet a ya a-dreñv)*. Ya ! me a 'z ay ; ne fell ket din beza ken ar muntrer, an den fallagr a dennn warnañ malloz ar varhadourien, an dremenidi, an intañvezed paour hag ar mammou glaharet, malloz ar bobl a-bez. Va fehejou a vezo lammet diwarnon hag e vijen du evel ar mouar, gwenn e teuin da veza evel an erh. Va breur, bennoz dit evdi ar fiziañs vraz ez-peus c'hwezet em halon.

Kleophas

Penaoz e kredez lavared, a-raog beza e welet, e pardono Jezuz da behejou dit ?

An Tremeniad

(souezet)

Ha te, n'out ket unan euz e zeskibien, den difeiz 'zo ahanout. E glevet ho-peus ho-taou o lavared e oa deuet evid an den dister ha dihalloud hag evid kement hini en-doa ezomm anezañ evid chom en e zav hag a houlennje sikour digantañ. Ya ! m'hel lavar deoh, kement hini a lakaio ennañ e fiziañs hag a zelaouo e gomzou, a vezo salvet hag a roio dezo nerz.

Barabbas

Med, neuze, hennez eo ar Zalver a dle dond ?

An Tremeniad

D'ar goan diweza a reas gand e zeskibien, e kemeront truez ouz an den ken dinerz, ken dihalloud, ha n'eo ket bet falvezet gantañ beza e-unan e nerz ha lakaad da goueza en e gorr dister hadenn ar vuhez a bado da viken ?

Ha n'en-deus ket roet d'e ebestel e gorr hag e wad dindan doareou ar bara hag ar gwin, evid o maga ?

Kleophas

Piou oh-c'hwi, pa ouezit gwelloc'h egedom ar pezh a reas ar Mestr ?

Simon

(outañ e-unan)

N'eo ket unan euz an daouzeg abostol ha koulskoude e komz euz pep tra evel p'en-divijje gwelet ha klevet e-unan.

An Tremeniad

An Tremeniad, en e zav, ne respont ket. E zaoulagad war-zu an neñv, eh en em ro da bedi hag o kemered bara eh astenn e zaouarn warnañ d'her benniga. Hen terri a ra goude-ze hag e ro peb a damm d'an daou zeskib. Or Zalver e-unan eo ; kerkent eur sklêrijenn skeduz a barr tro-war-dro dezañ evel pa deufe anezañ.

Jezuz

Kemerit ha debrit.

Ar ganerien

(e kuz, a gan war don ar Baradoz :)

Na pebez dudiu
A gav an eneou.
Pa vezont e Doue
Ha pa vez o Roue !

Kleophas ha Simon

(ouz hen anaoud hag o koueza e-harz e dreid).

Mestr.

Eliud

(laouen hag estlammet oll)

Jezuz Nazareth !

(An oll a gouez d'an daoulin).

Barabbas

(o sevel e benn, goude eur pennad).

Mestr, m'ho ped, kemerit truez ouz Barabbas.

Jezuz

(gand eur vouez kreñv)

E gwirionez, m'hel lavar dit, Barabbas, peogwir ez-peus bet keuz d'az pehejou ha pa 'peus fiziañs ennon, m'o fardon dit *(rei a ra e vennoz da Varabbas a zo stouet beteg an douar)*. Kerz e peoh ha n'ez ket da behi ken.

(Skedusoh c'hoaz eo bremañ ar sklêrijenn ; p'emañ ar sked en he brasa, Jezuz a ya kuit, evel teuzet er sklêrijenn. Teñvalijenn an noz a gouez adarre war bep tra. Barabbas a jom beteg ar fin evel beuzet er bedenn ; Abbas Ephraim a en em ziskouez war dreujou an nor, sebezet o weloud e vab war e zaoulin. Eliud hag an daou ziskib o sevel en o zav).

+

Simon

(laouen-braz)

Kleophas, ar Mestr 'oa hennez.

Kleophas

(laouen-braz ivez)

Ha ne gave ket dit, bremaig, e tride or halonou, en or hreiz, dre ma komze ?

Eliud
(*estlammet oll*)

Jezuz Nazareth ! Eñ 'oa.

Simon

Ya ! Or Mestr, or Mestr !

Ar ganerien

Sul Fask eo sul al levenez,
Sul all ne ra evel hennez.
Dudi an dud hag an Êlez
Alleluia !
Alleluia ! Alleluia ! Alleluia !

Eur haner

An dud vad n'o-deus ket gwelet
'Zo brao dezo m'o-deus kredet
En neñv e vint degemret !
Alleluia !
Alleluia ! Alleluia ! Alleluia !

An oll

Sul Fask eo sul al levenez,
Sul all ne ra evel hennez.
Dudi an dud hag an Êlez
Alleluia !
Alleluia ! Alleluia ! Alleluia !